



Ai'ta Breizh

<http://ai.ta.free.fr>

D'an aotrou J.Nicolas, maer

ha d'an holl guzulieren

Ti-kêr

22 700 LOUANEG

D'an 8 a viz Gwengolo 2012

Eil-skrid da : - Ao. Jean-Yves Le Drian

- It. Lena Louarn, eil-prezidantez Kuzul Rannvro Breizh e-karg deus ar yezhoù

- It. Corinne Erhel, kannadez pastell-vro Lannuon

PAL : Diwan e Louaneg... ar brezhoneg a vevo !

Aotrou Maer,

Itronezed hag aotrounien ar c'huzul-kêr,

Al lizher-mañ a skrivomp deoc'h peogwir omp fuloret ha nec'het-bras gant dazont ar skol Diwan hag a zo staliet en ho kumun. En arvar emañ ar skol-se, enni 27 brezhoneger yaouank ha tri den o labourat e yezh ar vro, war digarez na vefe ket a lojeiz eviti.

Daoust d'ar pezh ho peus embannet n'eo ket an arc'hant an dalc'h, ar mennozhioù ne lâromp ket. Abalamour ez eo Diwan ur skol brevez, abalamour e vez desket ar brezhoneg dre soubidigezh en enni, n'he dije ket plas ar skol-se en ho kumun ?! Met biskoazh n'en deus goulennet Diwan bezañ prevez : ur skol laik ha digoust ez eo, ha n'eo ket dre he fazi ma nac'h ar Stad ur statud publik dezhi. Ha reiñ un deskadurezh vrezhonek d'e vugale, e Diwan pe en ur skol all, a zo ur gwir. Dimp da c'hoût ne vez ket kelennet e brezhoneg e skol publik Louaneg. Heuget omp bet neuze o lenn ar pezh ho poa lâret d'ar mediaoù : "*n'eo ket ar gudenn-se hini Louaneg, met hini Diwan*". Ar c'hontrefed-mik a soñj dimp : lenn, klevet, komz ha deskiñ brezhoneg e pep lec'h e Breizh a zo ur gwir, d'an holl da zoujañ outañ. Ma varv ar skol Diwan-se, piv an Diaoul a gomzo brezhoneg en dazont e Louaneg ? Ha krediñ a rafet komz deus "sevenadur ar vro" c'hoazh ?

Reizh eo e chomfe Diwan e Louaneg, ha n'omp ket evit asañtiñ e vije bountet er-maez ar vugale-se ! Plas a zo evit an holl e Louaneg : salioù-klas dieub a zo er skol-vamm gozh, ti skol sant Erwan a zo da werzhañ... Aeset e vefe d'ar skol Diwan kavout an div sal goulennet ganti ha laoskel amzer dezhi da gavout un diskoulm padus... gant m'ho pefe c'hoant ha youl da skoazellañ anezhi ha da bartajiñ. Se 'zo kaoz e c'houlennomp ganeoc'h dilezel ar pezh a oa bet divizet ganeoc'h, hag asañtiñ da c'hoant tud Louaneg ha pelloc'h c'hoazh da zerc'hel bev ar brezhoneg er c'horn-mañ deus a vro Dreger.

Da c'hortoz ur respont deus ho perzh, resevit, Aotrounien hag Itronezed, hor gwellañ soñjoù.

Strollad Ai 'ta !

ai.ta.breizh@gmail.com



Ai'ta Breizh

<http://ai.ta.free.fr>

A monsieur J.Nicolas, maire
et aux conseillers municipaux

Mairie

22 700 LOUANNEC

Le 8 septembre 2012

Copie à : - Mr Jean-Yves Le Drian

- Mme Lena Louarn, vice-présidente du Conseil Régional de Bretagne, en charge de la politique linguistique
- Mme Corinne Erhel, députée de la circonscription de Lannion

OBJET : Diwan et la langue bretonne resteront vivants à Louannec !

Monsieur le Maire,

Mesdames et messieurs les conseillers municipaux,

Nous vous écrivons aujourd'hui pour vous faire part de notre vive inquiétude et de notre colère concernant le sort de l'école Diwan installée sur votre commune. L'avenir de cet établissement scolaire, qui regroupe 27 petits brittophones et trois adultes travaillant en langue bretonne, est aujourd'hui compromis au prétexte qu'il n'y aurait pas de logement disponible.

En dépit des annonces qui ont eu lieu, nous sommes persuadés que le fond du problème n'est pas financier, mais repose plutôt sur votre conception du vivre ensemble. Ainsi, parce que Diwan est une école privée, parce que l'on y apprend le breton et en breton, cette école n'aurait pas sa place dans votre commune ?! Pour rappel, Diwan n'a jamais souhaité avoir un statut privé : c'est une école laïque et gratuite, et ce n'est pas de son fait si elle n'a pu obtenir à ce jour un statut public. Le choix d'une éducation en breton pour ses enfants est également un droit, que ceux-ci soient scolarisés dans une école Diwan ou une filière bilingue. A notre connaissance, l'école publique de Louannec ne permet pas de suivre cette scolarité. Nous avons donc été choqués par vos propos dans les médias : *« ce n'est pas le problème de Louannec, c'est celui de Diwan »*. Nous pensons exactement le contraire : lire, écrire, parler et apprendre le breton partout en Bretagne est un droit, et c'est l'affaire de tous. Si cette école Diwan meurt, qui donc parlera encore breton demain à Louannec ? Et vous, osez-vous encore parler de « culture bretonne » ?

Il est légitime que Diwan reste implanté à Louannec, et nous ne pourrions accepter que ces enfants soient mis à la rue ! Il y a de la place pour tous à Louannec : des salles de classe sont libres dans l'ancienne école maternelle, l'ancienne école Saint Yves est à vendre... Il ne serait pas difficile de trouver les deux salles nécessaires à l'école Diwan et lui permettre ainsi de travailler sereinement à une solution pérenne... pour peu que vous y mettiez un peu de bonne volonté et que le mot « partage » vous dise encore quelque chose. Pour toutes ces raisons, nous vous demandons de revenir sur votre décision d'exclure Diwan, et de respecter la volonté de nombreux habitants de Louannec et d'ailleurs de voir le breton rester une langue vivante dans cette partie du Trégor.

Dans l'attente de votre réponse, veuillez agréer, Monsieur le Maire, Mesdames et Messieurs les conseillers, nos sincères salutations.

Le collectif Ai'ta !
ai.ta.breizh@gmail.com